

IV. bed ar micherour é c'hortoz bout anavezet

1. Goulennoù ar vicherourien

Poanius ha dañjerus eo labour ar vicherourien el labouradegoù hag er minoù.

Derc'hel a reont da vout evezhiet surveillés) edan an Eil Impalaeriezh.

Chom a ra edan evezh ar vicherourien get Al Levrig, ur seurt passporzh , ur benveg evezhiiñ sokial e-lec'h ez eus tu gwiriekaat euriadoù, diblasamantoù ar vicherourien get o fatroned. Emañ ret betek 1890.

O stuzoù-labour diaes hag o statudoù diasur a ro dezhe da vout emskiant eus en em aoziñ evit difenn o c'hoantoù.

Savet eo seurt kevredigezhioù genwarez (mutualistes) ha kenoberer(coopératives) a-benn gwareziñ anezhe ma' o deus gwallzarvoudoù.

En em aoziñ a reont tamm-ha-tamm en dachenn politikel **er sosialouriezh** , un emsav politikel en em ziorren e-kreiz an XIXvet kantved hag a nac'h aozadur ha mont en-dro ar gevredigezh industriel kapitalour èl m'emañ hag a faot dezhañ digreskiñ an dizingalderioù sokial. An Alaman , Karl marx 1818-1883 eo unan teorisianed meur ar sosialouriezh(sosialism).

E 1864 eo savet ar gevredigezh etrebroadel ar Labourerien a c'houlenn goproù uheloc'h, fin labour ar vugale ha digresk padelezh ar labour met berzhet e 1867.

■ Poanioù ar vuhez pemdez

Diaes e oa buhez pemdez ar vicherourien. Diyec'hedus e veze o lojeiz. Maget fall e oant, ha neuze klañv alies. Kalz berroc'h eget hini ar vourc'hizien e oa o chañs da vevañ kozh. Met adalek 1880 e kreskas ar goproù buanoc'h eget koust ar vuhez ha tamm-ha-tamm e teuas ar vicherourien er-maez eus an dienez.

4 Budjed ur micherour

Ur micherour a zezrevell e zispignoù sizhuniek.

« Je suis chevilleur. Je gagne 2 francs par jour. Ma femme est dentellière et gagne 1 franc par jour. J'ai quatre enfants, l'aînée a dix ans.

On mange 24 kg de pain..... 5, 40 fr

La viande est trop chère; nous ne mangeons que des débris de viande, trois fois par semaine..... 0,75 fr

Il n'y a que moi qui mange du beurre, 250 g par semaine..... 0,50 fr

Melasse et fruits..... 0,80 fr

Pommes de terre et haricots 1 fr

Lait (un demi-litre par jour)..... 0,50 fr

Loyer (j'habite une cave à trois mètres au-dessous du sol) 1,50 fr

Charbon : cette consommation est un peu forte parce qu'il faut faire sécher le linge au feu 1,35 fr

Savon et éclairage 1,10 fr

Malgré notre travail, nous vivons en mendiant et la loi le défend. »

Meneget gant Auguste Blanqui,
*De la Situation des
classes ouvrières en 1848.*



5 Lojeiz ur micherour e Berlin (1905)

TEULIAD Buhez ar vicherourien

Gant ar gemmdro industriel e oa aet war baataat micherourien al labouradegoù hag ar minoù; proletaerien a veze graet anezho.

■ Doareoù kalet da labourat

Poanius ha dañjerus e oa al labour el labouradegoù hag er minoù. Ar vicherourien a ranke heuliañ lusk ar mekanikoù ha gouzañv **devezhioù labour hir**. Stad ar maouezed hag ar vugale a oa gwashoc'h c'hoazh. Koulskoude ez eas an doareoù da labourat **war wellaat tamm-ha-tamm** (teul 6 p. 145).

3 Al labour er vengleuz

Testeni ur vaouez 37 vloaz.

« Sachañ a ran bagoniadoù glaou, labourat a ran etre c'hwec'h eur mintin ha c'hwec'h eur noz. Un eurvezh ehan a vez da greisteiz, evit debrñ merenn; evit se e vez roet din un tamm bara gant amann, met netra da evañ. Ur gouriz a vez ganin war an dargeiz, ur chadenn a dremen etre ma divesker hag ez an war-raok gant ma daouarn ha ma zreid. C'hwec'h maouez hag un hanter dousennad a baotred ha merc'hed zo er puñs e-lec'h ma labouran. El lec'h ma labouran eo gleb-teil ar foz hag e ya an dour uheloc'h eget ma botoù. Gleb-par-teil e chom ma dilhad kazi a-hed an deiz... »

Arroud rentañ-kont ur c'hannad saoz, 1842.



1 Ur miner yaouank e hanternoz ar Frañs (1906)

2. Respontoù politikel

A-raok 1864 n'o deus ket ar gwir da vout sindikaet na da herzel get al labour.

Amluskek(ambivalente) eo emzalc'h Napoleon III hag ar Stad e-keñver ar vicherourien.

E 1844 en deus embannet e levr *l'Extinction du paupérisme* e-lec'h eo emskiant eus mizer ha paourentez ar vicherourien.

E 1864 eo al lezenn Ollivier a aotre an harz-labour nemet evit gounid tu ar vicherourien evit an dilennadegoù.

E 1874 : Muzulioù sokial ez eus ivez get padelezh an devezh –labour digresket da 10 euriad pe difenn groñs labour ar vugale edan 13 vlez.

Kas a ra kentoc'h muzulioù paternalegezh (paternalisme) hag aluzonus(charitables): gweladenn micherourien hag tud paour, krouidigezh aziled evit ar vicherourien klañv e Pariz, krouidigezh ar « fornelloù ekonomikel » (fourneaux économiques), hêrêzh eus Restos du coeur.

Napoleon III a gont kentoc'h evit gwelaat stuzoù ar micherour àr an araokadenn ekonomikel er vro. Kresk industriel an Eil Impalaeriezh, harpet get ar Stad, a rankfe ivez in fine lakaat ar vicherourien da deniñ splot outañ hag ivez a-drugarez da dreuzfurmadur Pariz e vo Frañs e-penn ar modernelezh.

Met eo c'hoazh mouget taer an harzoù-labour get hini e Le Creusot e 1870 e-lec'h e c'halv Schneider 3000 soudarded da adesevel an urzh ha terriñ 23 devezh harz-labour pe c'hoazh d'an 16 a viz Even 1869 e Ricamarie (e-tal Sant-Etienne) , an arme a ya da herzel an harzourien-labour ha tenniñ àr an engroez a c'houlenn o frankiz, 14 den a varv.

Tamm-ha-tamm mennozhioù komunour-marksist-sosialour en em skign e bed ar micherour get pennadoù eus *Manifesto ar strollad komunour* eus Karl Marx (1848)a zispleg e rank ar broletaerien kemer ar galloud dre un dispac'h.

1864 lezenn
gwir harz-
labour